



Kann@del UGB 3

Keneiled ker,

Degouezhet eo fin ar bloavezh hag ar bloaz-mañ hon eus gwelet c'hoazh pegen bresk e oa dazont ar c'helenn divyezhek e Breizh :

- programmoù hollek nevez na glotont ket gant pedagogiezh an divyezhegezh,
- programmoù yezhoù « rannvro » nevez evit ar c'hentañ derez na glotont ket gant implij hon eus deus ar brezhoneg en hor c'hlasoù,
- kevrat ebet etre ar rannvro hag ar stad evit merañ ar c'helenn divyezhek (pa ouzer e oa sañset bezañ sinet e miz Genver 2007...),
- kresk ar c'helenn divyezhek stanket abalamour d'an diouer a gelennerien,
- stad dipitus an opSION kazi e pep lec'h en eil derez...

Da c'houde ur raktres cheñchamant bonreizh klouar a-berzh ar gannaded ha respont jakobin ar senedourien e teu war-wel un dra : n'haller ket kaout fiziañs e Stad Bro C'hall evit gwareziñ ha broudañ ar brezhoneg. Aze e teu da vezañ splann eo d'ar Vretoned ha d'o dilennidi da gas o yezh war-raok, un diskoulm nemetken neuze : an treuzkas galloudoù.

Emvod gant J.Y. An Drian : *Peseurt dazont evit ar c'helenn divyezhek ?*

J. Y. An Drian hag ar c'huzul rannvro o doa votet e 2004 gouestloù a-unvouezh evit dazont ar brezhoneg. Tro hon eus bet da vezañ degemeret gant ar prezidant d'an 12 a viz Mezheven ha goulennet hon eus e soñj hag e raktresoù da geñver an treuzkas galloudoù evit ar brezhoneg goulennet gantañ gant François Fillon e miz Mae.

1) Pareañ mankoù ar Stad

Komzet hon eus gantañ da gentañ deus ar fed e klask ar Stad en em ziober tamm ha tamm deus ar servijoù publik lec'hel. Lâret en deus deomp e sante e yae war dostaat ar stourm sokial hag ar stourm sevenadurel an eil deus egile. Ret e vo d'ar rannvro kinnig diskoulmoù a-raok ma'z afe an traoù war vreinaat. N'eus ket kalz a fizañs en F. Fillon evit ma rofe bremañ ar gouarnamant an treuzkas galloudoù evit ar brezhoneg da rannvro Breizh.

2) Goulenn an treuzkas-galloudoù

Gwelet en deus ar raktres cheñchamant bonreizh e-giz un araokadennig met goût a ra mat ne vo ket a-walc'h evit diorren ar brezhoneg. Gortoz a ra kalz deus al lezenn a zo bet prometet gant Christine Albanelle e 2009 evit ar yezhoù « rannvro ». Gallout a raio al lezenn-mañ dont da vezañ un nor evit goulenn ul lezenn a aotreo an treuzkas galloudoù evit ar brezhoneg.

Prest eo da vont da Bariz gant Euskariz hag Elzasiz da stourm evit al lezenn-se. (« Droit à l'expérimentation » aotreet gant « La loi relative aux libertés et responsabilités locales », JP Rafarin, 2004)

3) Peseurt galloudoù ?

C'hoant en deus ar rannvro ar galloudoù war kement tra a sell deus ar c'helenn divyezhek. Ar Stad a rafe war-dro ar programmoù hollek hag ar rannvro a rafe war dro ar peurrest : tuta, stummañ ha goprañ kelennerien, programmoù brezhoneg, an enselladennoù, ar gartenn skol...

Tro hon eus bet ivez da c'houlenn digantañ resisadurioù war an darvoudoù war ar stern pe da sachañ e evezh diwar-benn kudennoù a chal ac'hanomp :

4) Ar gevrat raktres 2007-2013, n'eo ket bet sinet: Perak ? Pegoulz ?

Sinet e vo a-benn nebeut. Daleet eo bet peogwir emañ o varc'hata gant ar Stad evit ma c'hellfe ar rannvro bezañ e penn ar gartenn-skol gant ar stad.

5) Cheñchamant statud Ofis ar Brezhoneg : Sevel benveg an treuzkas galloudoù ?

Tamm ebet, an Ofis a zeuio da vezañ un EPCC evit kenderc'hel en un doare padus gant ul labour a ra mat-tre, un ofis teknik eo.

6) *Peseurt diskoulm a-enep an diouer a gelennerien ?*

Emañ o vont ar prezidant da soñjal e yalc'hadoù bras (tro-dro un hanter gopr ?) evit ar re b/PE1, diwar skouer ar yalc'hadoù IPES gwechall.

7) *Plas Danvez Breizh er skol ?*

Kompren a ra eo a-bouez e vije kelennet danvez Breizh (istor, douaroniezh, yezh...) da gement skoliad e Breizh met d'e soñj e vo dibosupl rediañ kelennerien Breizh d'en ober. Emañ e-soñj memestra embann ul levr war danvez Breizh (un diverradenn) a vo roet da bep lisead eilvet. Graet e vo an dra-se adalek 2010 (ma vez dilennet en-dro) dre ma n'en deus ket droed da embann seurt teulioù e-pad ar bloavezh a-raok an dilennadegoù.

Conseil Académique des Langues Régionales : ***Netra da c'hortoz...***

Daou CALR a zo bet ar bloaz-mañ, unan d'an 11 a viz Genver evit ar pezh a sell ouzh an eil derez hag unan d'ar 4 a viz Mezheven evit ar c'hentañ derez. Ar CALR a vod ar velestradurezh, an dilennidi, ar sindikadoù hag ar c'hevredigezhioù a ra war dro ar yezhoù rannvro. Ar c'huzul-se n'eus galloud ebet, gallout a ra reiñ e ali diwar mont en dro ar c'helenn er yezhoù « rannvro » en akademiezh nemetken.

1) *An eil derez*

Disklêriet eo bet unan hag unan an eurvezhioù opSION brezhoneg serret a skolaj da skolaj hag a lise da lise, abalamour d'an diouer a c'houlenn hervez ar velestradurezh.

Un destenn a zo bet votet diwar kinnig UGB. An destenn-se a c'houlenne e vije adsavet ar programmoù brezhoneg evit ar c'helenn divyezhek er c'hentañ derez diwar ar programmoù galleg. Degemeret eo bet an destenn.

2) *Ar c'hentañ derez*

Ar CALR-se a zo bet lakaet e fin ar bloavezh-se peogwir e oa bet diblaset disoc'hoù ar gartenn-skol-nevez da c'houde an dilennadegoù-kêr. Kaoz a zo bet deus an diouer a gelennerien er c'hentañ derez er c'helenn divyezhek. Ar rektor hag ar rannvro o deus kinniget e vije aozet ur studiadenn sokiologel war ar re a c'hellfe bezañ dedennet gant ar vicher mestr-skol divyezhek.

Resisadurioù hon eus bet war an eurvezhioù skoazell a vo kinniget d'ar skolidi adalek an distro-skol a zeu, gallout a raint bezañ kinniget e brezhoneg. Ar pal a zo sklaer : bezañ barrek da lenn, skrivañ ha kontañ pa vije e galleg pe e brezhoneg.

Gwelout a reer splann deus peseurt tu e c'hello dont al lañs a gaso ar c'helenn brezhonek war-raok. N'ouzer ket c'hoazh petra a zeuio da vezañ ar cheñchamant bonreizh met forzh penaos, ma hon eus c'hoant e chomfe ar brezhoneg ur yezh vev ha ma hon eus c'hoant he dije un implij sokial, arabat gortoz re bell e vefe roet ul lañs d'ar yezhoù minorelaet gant ar Stad. An diskoulm a zeuio deus ar rannvro pe ne zeuio ket.

Gervel a ra UGB da vont da vanifestiñ d'an 20 a viz Gwengolo e Naoned evit an treuzkas galloudoù deus ar Stad d'ar rannvro evit ar brezhoneg !